



Politique linguistique

2025-2028



**Politikerezh yezh Skol-Veur Breizh-Izel
Stad an traoù, bilañs ha diaweloù 2024**

sea·EU
EUROPEAN UNIVERSITY OF THE SEAS

UBO
Université de Bretagne Occidentale

SOMMAIRE

Digoradur	3
Perak ur politikerezh yezh er skol-veur ?	3
Hentenn	4
I. politikerezhioù yezh er skolioù-meur	5
I.1 <i>Ar goulenn hollec'hel</i>	5
I.2 Saoznkadur ar skolioù-meur.....	5
II. Un état des lieu de l'existant	7
II.1 Ar brezhoneg e SBI	7
II.2 Kelenn ar yezhoù er c'hinnig stummañ LMD	8
II.3 Ar c'hinnig GYE e SBI	11
II.4 Ur c'hinnig klokaat evit ar studierien	12
II.5 Ur c'hinnig stummañ ha sikour ar c'hoskor.....	13
II.6 Ur c'hinnig enlinenn gant Emglev Skolveurel Europa SEA-EU	13
II.7 Ar Burev Treiñ e SBI.....	14
II.8 Stad an traoù er stummadurioù a vez kaset en ur yezh all estreget ar galleg.....	14
II.9 Ar Garta <i>English-friendly</i>	16
II.10 Fiñvusted etrebroadel	17
III. An ezhoumoù a-fet barrezhioù yezhel e Frañs hag en estrenvro	17
III. 1 Kenemprañ micherel hor studierien	18
III. 2 Fiñvusted ar studierien e SBI	18
III. 3 Yezh an obererezhioù enklask.....	18
III.4 Yezh ar mont en-dro melestradurel	19
III.5 Yezh ar c'hehentiñ diavaez.....	19
IV. Klozadurioù diawel	19

Digoradur

Perak ur politikerezh yezh er skol-veur ?

Kas a ra Skol-Veur Breizh-Izel (SBI) ur politikerezh yezh youlek hag a glot gant daeoù an XXIV^{vet} kantved, pa'z eo stag ouzh al lec'h m'emañ ha war un dro digor da vat war ar bed. Graet eo ar politikerezh-se evit lakaat etrebroadeladur an deskadurezh uhel hag an enklask da vont keñver-ha-keñver gant ar reolennadur e talvoud ma lavarer ez eo ar galleg yezh ar c'helenn, ha lakaat identelezh Breizh war-wel war ar memes tro.

Er bed akademikel bedelaet-mañ e fell da SBI kreñvaat an tu etrebroadel evit bezañ lakaet muioc'h war-wel, diorren kevelerezhioù nevez ha reiñ digarez d'ar studierien ha d'ar c'hoskor da vont da lec'h all da labourat. Pouezus-bras eo mestroniañ ar yezhoù estren, ar saozneg en o zouez ha re all ivez, evit aesaat an darempredoù ha diwar-se e c'hall ar studierien prenañ skiant en estrenvro, ar glaskerien kenlabourat gant ensavadurioù brudet er bed a-bezh hag ar c'hoskor harpañ kendivizout war o doareoù ober. Brudañ ar yezhoù estren zo ur briorelezh strategel evit ar skol-veur p'he deus votet ar Garta English-friendly ha kinnig a ra un toullad stummadurioù pe unvezioù kelenn e saozneg penn-da-benn pe evit ul lodenn anezho hepken.

Diouzh an tu all e fell da SBI kendalc'her da ziorren ur politikerezh degemer uhel gant ar c'hinnig Galleg Yezh Estren (GYE) a gaver eus an aotreegezh betek an doktorelezh.

Tomm-tre eo SBI ouzh hec'h identelezh vreizhat ivez. Enni emañ ar greizenn gentañ evit an enklaskoù keltiek en Europa, Kreizenn an Enklaskoù Breizhek ha Keltiek (KEBK). Fellout a ra dezhi gwareziñ ha brudañ ar yezhoù ha sevenadurioù rannvroel. Disklêriañ a ra neuze he deus ur roll gwareziñ ur glad yezhel dibar ha treuzkas anezhañ d'ar rummadoù da zont.

Daou bal zo neuze d'ar politikerezh yezh puilh gant SBI : aesaat etrebroadeladur ar skol-veur dre an implij eus ar yezhoù estren hag ar stummañ e GYE, ha war un dro gwareziñ ha brudañ ar yezhoù rannvroel, ar brezhoneg dreist-holl. An nerzh yezhel-se, etre al live lec'hel hag ar live bedel, a ro ur perzh dibar da SBI : bezañ ur skol-veur digor war ar bed ha gwriziennet don en he c'horn-bro.

Aozet eo bet e labour gant Emglev Skolveurel Europa SEA-EU etre trevelloù ha produadurioù. Pal an drevell 4.6 eo brudañ ar barregezhioù yezhel e saozneg hag al liesyezhegezh e diabarzh an Emglev. Evit en ober e rank ur strollad 10 arbennigour en em vodañ ha studiañ hag-eñ e c'haller sevel ur politikerezh yezh boutin etre izili an Emglev.

A-raok al labour-se e oa en em vodet ur strollad labour e Skol-veur Breizh-Izel evit sevel politikerezh yezh hor skol-veur. Etre miz Du 2023 ha miz Mae 2024 e oa en em vodet tud dileuriet eus meur a servij e SBI (s.o. ar stagadenn 3).

Ngas : Evit aesaat lenn an teul-mañ eo bet implijet ar stumm gourel pa vez kaoz eus koskor hag implijerien ar skol-veur, ar pezh a zo da vezañ komprenet evel gourel ha benel.

I. politikerezhioù yezh er skolioù-meur

« Degasomp da soñj da gentañ-penn eus daou bennaenn : ha pa ne vefe ket emskiant an dud e vez ur politikerezh yezh atav ; ur c'houst bennak zo gant kement politikerezh yezh a vefe. »¹

I.1 Ar goulenn hollec'hel

Goulenn a reer gant ar skolioù-meur bezañ « hollec'hel » :

- Diouzh un tu e vez lakaet ur wask kreñv war ar skolioù-meur er broioù na gomzer ket saozneg, dezho d'ober muioc'h-mui gant ar saozneg war zigarez an etrebroadeladur.
- Diouzh an tu all e fell dezho bezañ efedus, rak-se e kinnigont stummadurioù e yezh-vamm ar studierien alies-tre.
- Ar skolioù-meur a c'hall kaout ur roll politikel ivez pa gavont gwelloc'h ober gant ar yezh vroadel pe ar yezh rannvroel, pe pa roont brud da liesseurtes ar yezhoù.

I.2 Saoznekadur ar skolioù-meur

Ne vez ket saoznekaet an holl gevrennoù a gaver er skolioù-meur er memes doare. Sed penaos e tremen an traoù peurliesañ :

++

Skiantoù « dik » - skiantoù ar beved - skiantoù sokial - skiantoù an den

--

A-van-da-van e vez saoznekaet, en urzh-mañ :

An enklask, ar c'helenn, ar c'hehentiñ diabarzh ha diavaez

¹ Lagarde, C. (2022). Opter pour une politique linguistique d'établissement : un modèle Shanghai ou un modèle COP 2... ? E La gouvernance linguistique des universités et établissements d'enseignement supérieur (p. 79 90). Arsellva europat al liesyezhegezh. <https://www.cairn.info/la-gouvernance-linguistique-universites-etablisements-enseignement-superieur--9782730216968-p-79.htm>

Evel-se e vez saoznekaet :

An doktorelezhioù, ar masterioù, hag an aotreegezhioù goude-se

Merzhout a ra François Grin², un ekonomour gall anezhañ, meur a efed hag a zeu, pa a c’hall dont da-heul ar saoznekadur-se :

- Efedoù splann : ne vez ket implijet kement a yezhoù ken en obererezh skiantel (da sk. er prezegennoù hag er c’helaouennoù), ar pezh a zo fall evit ar justis yezhel (Shorten, 2017) ;
- Efedoù gwirheñvel : (i) un digresk, war hir dermen, eus liestuegezh ar bed, ar pezh a weler gant al liesseurted yezhel e-unan [...] ; (ii) cheñch ar c’hempouez geopolitikel (rak an obererezh skiantel en ur yezh bennak a bouez kalz a-fet galloud flour) ; (iii) lakaat digreskiñ kalite ar c’helenn hag an deskiñ, pa ne vez ket mestroniet mat ar saozneg dreist-holl, evit ar gelennerien koulz hag ar studierien ;
- Efedoù hag a c’hall bezañ : gwall levezonet e c’hall bezañ an eskemm gouiziegezhioù hag an diorren anezho (Frat et Herreras, 2016). Implijout ur yezh hepken a c’hall aesaat an eskemm gouiziegezhioù hag an diorren anezho pa eeuner ar c’hehentiñ, re wir eo. Gallout a ra bezañ ur skoilh ivez avat, rak embann-distagañ ha klevet-kompren titouroù en ur yezh na vestronier ket mat a c’hall bezañ sius (ha pa n’en em renter ket kont dalc’hmat).

² Grin, F. (2022). Internationalisation et anglicisation des universités : Diagnostic et éléments de stratégie. E La gouvernance linguistique des universités et établissements d’enseignement supérieur (p. 123 131). Arsellva europat al liesyezhegezh. <https://www.cairn.info/la-gouvernance-linguistique-universites-etablissements-enseignement-superieur--9782730216968-p-123.html>

II. Un état des lieux de l'existant

II.1 Ar brezhoneg e SBI

Stad ha dalc'hoù

Ur yezh vev eo ar brezhoneg e Skol-veur Breizh-Izel, ur yezh labour ha deskiñ e meur a gevrenn : kevrenn al Lennegezh ha Skiantoù an Den, kevrenn Skiantoù ar Sport hag an Deskadurezh, hag en EBUKD (Ensavadur Broadel Uhel ar C'helennerezh hag an Deskadurezh). Ur roll bras he dez SBI war dachenn an enklask ivez gant Kreizenn an Enklaskoù Breizhek ha Keltiek (KEBK).

Emañ SBI e-mesk an ensavadurioù pennañ a c'hall kaout ur perzh bras evit brudañ ar brezhoneg. Unan eus ar perzhioù pennañ a ya d'ober identelezh Breizh eo, e Kornôg ar vro dreist-holl pa oa ar yezh kentañ eno etre an dud betek kreiz an XXvet kantved, hag evel an holl yezhoù eo ur binvidigezh a-fet sevenadur hag ul lodenn pouezus-bras eus glad sevenadurel ar bed.

En he reizh emañ ar skol-veur er c'heñverioù kefredel ha buhezegezhel evit ober al labour brudañ-se. Reizh eo ivez ez-lezenn hervez meur a destenn, evel ar mellad 7 eus al lezenn niv. 84 - 52 eus ar 26 a viz Genver 1984 diwar-benn ar c'helenn uhel (al lezenn a vez graet « Savary » anezhi). Hervezi « Servij publik ar c'helenn uhel (...) a daol evezh ma vo kaset war-raok ha pinvidikaet ar galleg hag ar yezhoù ha sevenadurioù rannvroel. Sikour a ra studiañ ha talvoudekaat ar pezh a ya d'ober ar glad broadel ha rannvroel ».

Harpañ ar brezhoneg

Harpañ ar brezhoneg zo pouezus abalamour da SBI da vezañ diouzh c'hoantoù ar gevredigezh e Breizh, kresk ar boblañs skoliataet er skolioù dre soubidigezh pe divyezhek, ha diouzh an dibaboù politikel a vez graet gant ar strollegezhioù tiriadel, dreist-holl ar re a ro bec'h evit brudañ an divyezhegezh en un doare gwelus hag oberiant (Kuzul-rannvro Breizh, Kuzul-departamant Penn-ar-Bed, Brest Meurgêr, Kemper Breizh Izel ha kement zo).

Skol-veur Breizh-Izel he deus kensinet ar « C'hendivizad a-ziforc'h evit treuzkas yezhoù Breizh ha diorren an implij anezho er vuhez pemdez 2022-2027 » etre ar Stad ha Rannvro Breizh. Ennañ e vez graet anv eus « Ar gensinerien a zo o fal evel-se, dre o engouestl er c'hendivizad nevez-mañ, ober diouzh ma c'hall ar muiañ ar gwellañ a dud o deus c'hoant d'en ober, deskiñ, selaou, komz ha lenn brezhoneg pe gallaoueg ». Ar

c'hendivizad-se a zeu war-lerc'h an hini a yae eus 2015 da 2020, a oa bet kensinet gant SBI ivez.

E 2016 e oa bet ofisiellet hec'h engouestl gant SBI pa oa bet sinet ar garta Ya d'ar brezhoneg, a oa bet sinet ivez gant Kevread ar C'hevredigezhioù Studierien e Breizh (Fédéb) (<https://www.fr.brezhoneg.bzh/evenement/1752/50-actualite.htm>).

Divizet e oa bet a-unvouezh, gant Kuzul-merañ Skol-veur Breizh-Izel d'an 22 a viz Du 2016, dibab 7 engouestl evit ar brezhoneg. Sed amañ an engouestloù :

- krouiñ hag implijout kartennoù hetoù brezhonek, war baper pe niverel, kinnig kartennoù bizit divyezhek d'an dud a labour er skol-veur ha broudañ anezho d'ober ganto,
- staliañ ur panellerezh divyezhek koulz diabarzh ha diavaez evit an aveadurioù a zo stag ouzh ar skol-veur, pa vezont renevezet pe pa vez savet re nevez,
- ober diouzh ma c'hall an holl studierien e SBI kaout unvezioù kelenn dieub e brezhoneg, war o lec'h stummañ pe nepell ac'hano,
- renabliñ barregezhioù ha c'hoantoù stummañ ar c'hoskor e SBI,
- studiañ gouiziegezh ha dedenn ar studierien e SBI evit a sell ouzh ar brezhoneg,
- harpañ ar Redadeg evit skoazellañ ar brezhoneg, ha kemer perzh enni.

Diwar ar 7 ober dibabet e oa bet kaset 6 da benn, rak-se e oa bet roet e oa al label 1 eus ar garta Ya d'ar Brezhoneg da Skol-veur Breizh-Izel gant Ofis publik ar brezhoneg e 2019.

Lavaret e oa bet e oa bet kaset « ul labour vat en-dro abaoe tost da 3 bloaz gant Skol-veur Breizh-Izel. Delc'her a ra da vont gant hec'h hent atav ha da vrudañ ar brezhoneg gant ur c'hehentiñ divyezhek ledanoc'h ha koulzadoù brudañ ingal bep bloaz. »

Kendelc'her a ra gant al labour-se bepred. Un teul anvet « [Le breton à l'UBO : préserver, enseigner, étudier et promouvoir une langue et une culture régionale](#) », savet gant ar servij kehentiñ e SBI, a oa bet lakaet enlinenn e miz Ebrel 2024 .

II.2 Kelenn ar yezhoù er c'hinnig stummañ LMD

Reolennoù broadel ha framm ar c'hinnig stummañ

El lizher-sterniañ a-berzh Skol-veur Breizh-Izel evit ar c'hinnig stummañ 2022-2027 (poent 1.1) e lenner « hervez ar reoliadur e talvoud eo ar galleg ar yezh kelenn ordinal ».

Stummadurioù zo a c'hall bezañ kelennet en ur yezh all estreget ar galleg koulskoude, pe hervez doareoù etre daou, evel ar stumm English-friendly³. Sellet a ra koulz ouzh ar

³ Sellet ouzh ar Garta English-friendly pajenn 11

stummadurioù war ar yezh, evit abegoù splann pe istorel (kursus YLSER pe YEP), hag ouzh degemer ar studierien eus an estrenvro, abalamour d'ober an traoù kemm-ouzh-kemm gant ar gevelerien etrebroadel.

War ar memes tro e vez roet bec'h er c'helc'hiad kentañ evit uhelaat barregezh an holl ziplomidi er c'helc'hiad-se evit a sell ouzh ar yezhoù estren, ar pezh a glot gant palioù ar Skol-veur Europat SEA-EU. Diwar-se e c'hall muioc'h-mui a studierien delc'her gant o c'hursus, e SBI pe e lec'h all, e stummadurioù hag a vez roet en ur yezh all. »

Evit ar pezh a sell ouzh deksiñ ha priziañ ar barregezhioù yezh (poent 2.7) eo skrivet en diferad eus an 30 a viz Gouere 2018 diwar-benn diplom broadel an aotreegezh (mell. 10) hag en diferad eus an 3 a viz Ebrel 2020 diwar-benn an testeniekaat e saozneg (mell. 22) e rank ar studierien tapout barregezhioù yezh hag a sikouro anezho da lenn, da skrivañ, da gompren ha komz en ur yezh estren vev da nebeutañ. Priziet e vez al liveoù e deroù ar stummadur skolveurel evit kinnig kentelioù a-vod, ha rankout a reont bezañ testeniekaet, evit ar saozneg da nebeutañ, gant un aozadur diavaez anavezet el live etrebroadel ha gant ar bed sokio-ekonomikel, a-raok fin ar c'helc'hiad kentañ⁴.

Fellout a ra da SBI ober diouzh ma c'hallo ar muiañ a studierien kadarnaat al live B2 hervez ar Framm Europat Boutin Dave evit ar Yezhoù (FEBDY) e saozneg, evit aesaat dezho mont da studiañ en estrenvro. E kement hentad stummañ a zo e ranker neuze kaout kentelioù dibaouez en ur yezh vev estren evit arbennigourien war diskiblezhioù all (YEADA) gant 2 gredad ECTS da nebeutañ bep c'hwec'hmiziad, kenurzhiet asambles gant skipailh kelenn ar c'hevrennoù hag ar Pol Yezhoù, d'ar studierien da c'hallout diorren o barregezhioù yezh. Daoust m'eo rediet tremen un arnodenn testeniekaat e saozneg da gentañ e kinnigo SBI un dibab yezhoù ivez, diouzh c'hoantoù ar studierien ha diouzh dalc'husted ar c'hinnig dre vras.

Lakaet e vo ur stignad e plas a-ratozh evit ar menegoù YLSER ha YEB pa vez enno kentelioù yezhoù evit arbennigourien. Ouzhpenn-se e ranko ar stignad-se prientiñ ar studierien da dremen un testeni e saozneg.

N'eo ket ken sklaer ar framm evit ar masterioù ha ma'z eo evit an aotreegezhioù. Goulennet e vez gant ar stummadurioù master kinnig ur stummadur yezh ma n'eo ket resisaet an niver a eurvezhioù, hag un arnodenn evit priziañ live barregezh yezh ar studierien, anez live izelañ ebet termenet gant ar Skol-veur.

⁴ Nullet e oa bet ar redi da dremen un arnodenn desteniekaat e saozneg en aotreegezh war ziviz ar c'huzul-Stad d'ar 7 a viz Mezheven 2022. Delc'her a ra SBI da arc'hantaouiñ un arnodenn desteniekaat evit pep studier en aotreegezh en unan eus an teir yezh a ginniger e SBI : TYDU (Testeni Barregezh war ar Yezhoù en Deskadurezh Uhel) B1 pe B2 e saozneg, spagnoleg pe italianeg. Ur priz digresket a vez kinniget d'ar studierien master ha doktorelezh, gant ma vezont enskrivet er Servij Skol-veur Stummañ Dibaouez hag A-bep-eil (SSSDE).

Kelennadurezh yezhoù evit arbennigourien

Kevrennoù arbennikadurioù Yezh, Lennegezh ha Sevenadurezh saoznek, spagnolek ha brezhonek/keltiek zo en USE Lennegezh ha Skiantoù an Den e SBI.

Ar c'hursusoù a vez kinniget e SBI a ya eus an aotreegezh d'an doktorelezh. En hentennoù-se, en aotreegezh, e kelenner er yezh tal da gentañ-penn. Er c'hursus Yezhoù Estren Pleustrek e vez kinniget 3 hentad : saozneg-spagnoleg, saozneg-alamaneg ha saozneg-sinaeg. Enno e vez graet ar c'hentelioù yezh, kehentiñ ha sevenadurezh er yezh tal.

Meur a stummadur a vez kinniget d'ar studierien a oa en aotreegezhioù-se, ar master meneg Arzoù, Lennegezh ha Sevenadurezh, hentad Testennoù, Skeudennoù, Yezhoù Estren (TSYE) dreist-holl, ar Master meneg Yezhoù ha Kevredigezhioù, hentad Yezhoù ha Sevenadurioù Keltiek Stok (YSKS), hag ar master Sevenadurezhioù, Sevenadurioù ha Kevredigezhioù (SSK). UI lodenn vras eus ar c'hentelioù er masterioù TSYE ha YSKS a vez graet e saozneg.

Gallout a ra ar studierien mont e masterioù micherel e fin ar stummadurioù-se en aotreegezh, evel ar master meneg Treiñ ha Jubenniñ, hentad Skridaozañ-Treiñ hag ar master meneg Yezhoù Estren Pleustrek, hentad Melestrañ Raktresoù Etrebroadel Liesyezhezh (MREL). An darn vrasañ eus ar c'hentelioù-se a vez kelennet e saozneg.

Gallout a ra ar studierien delc'her gant o stummadur er master meneg Galleg Yezh Estren (GYE), hentad Yezh, Kelennerezh, Sevenadur.

Stummadur an danvez kelennerien war ar yezhoù en eil derez

Ar c'hentelioù kelennadurezh ar yezhoù ha diorren ar barregezhioù micher a vez kelennet er Masterioù MKDS Yezhoù gant EBUKD (Ensavadur broadel uhel ar c'helenneriezh hag an deskadurezh) Breizh e c'hwec'h lec'h stummañ. En enskrivadur kentañ e vez enrollet ar studierien e Skol-veur Roazhon 2 (hentad saozneg, spagnoleg, italianeg, alamaneg, sinaeg), pe e SBI (saozneg ha spagnoleg), pe e SSB (saozneg). An hentad MKDS brezhoneg eil derez a vez kelennet e Sant-Brieg gant SBI ha Roazhon 2 asambles. Lakaet e vo ar master MKDS sinaeg a-ispilh en distro-skol 2024.

Serret e oa bet ar gevrenn alamaneg en USE Lennegezh ha Skiantoù an Den e 2017 abalamour ma ne oa ket trawalc'h a studierien. Diwar-se, ar masterioù MKDS alamaneg en EBUKD Breizh a vez enskrivet e Skol-veur Roazhon 2 nemetken evit ar stummadur war ar yezh, evel evit an italianeg. Ezhomm zo da zegas lañs en hentadoù-se.

Kelenn ar yezhoù d'an arbennigourien war diskiblezhioù all (YEADA)

Evit pep studier en aotreegezh e SBI e vez 6 modulenn kelenn yezhoù estren, ur vodulenn gant 3 c'hredad ECTS bep c'hwec'hmiadiad. Da lavaret eo, diouzh ar stummadurioù, 16, 18 pe 20 eurvezh kentelioù e-kerzh ur c'hwec'hmiadiad.

Ar saozneg eo ar yezh estren nemeti a vez kinniget en USE Skiantoù ha Teknikoù, en USE Mezegiezh hag er Gevrenn Skiantoù ar Sport hag an Deskadurezh.

Da zibab zo etre saozneg, spagnoleg hag alamaneg en USE Gwir-Ekonomiezh-Melestrañ-MES (Melestradurezh Ekonomikel ha Sokial). En USE Eko-melestriñ hag en EME (Ensavadur evit mererezh an embregerezhioù) e c'haller kemer un eil yezh kelenn da zibab ouzhpenn.

Un dibab 10 yezh zo en USE Lennegezh ha Skiantoù an Den evit ar studierien en aotreegezh hag e masterioù zo : saozneg, alamaneg, arabeg, brezhoneg, sinaeg, spagnoleg, iwerzhoneg, italianeg, portugaleg, ruseg. Dibab a ra ar studierien ur yezh e-mesk an 10 yezh a vez kinniget ha lakaat a reont o anv en ul live hag a vez termenet gant ar Framm Europat Boutin Dave evit ar Yezhoù (FEBDY).

Ensavadurioù Skol-veur a Deknologiezh (ESAD) Brest-Montroulez ha Kemper a ginnig saozneg hag un eil yezh (spagnoleg pe alamaneg).

Skol-uhel ijinourien war gounezvouederezh Breizh (SUIGB) a ginnig saozneg evel yezh kentañ ret, ha rediañ a ra ar studierien da desteniekaat al live B2 da nebeutañ e fin ar c'hursus, hag un eil yezh vev (spagnoleg pe alamaneg).

EBUKD Breizh, er master MKDS, a ginnig 24 eurvezh stummadur war ur yezh (saozneg, spagnoleg pa c'haller) d'ar studierien en hentad kentañ derez. D'ar skolioù-meur lec'h m'eo enskrivet ar studierien eo d'ober war-dro o stummadur en hentadoù eil derez. Rankout a reer kadarnaat al live B2.

II.3 Ar c'hinnig GYE e SBI

Ar Pol Yezhoù a aoz ar c'hentelioù Galleg Yezh Estren a vez profet, kuit a baeañ, d'an holl studierien etrebroadel e-pad an daou c'hwec'hmiadiad eus o bloavezh kentañ e SBI.

Gallout a reer mont d'ar c'hentelioù-se en diavaez d'ar maketennoù stummañ, pe e-lec'h un UK Yezhoù evit ar studierien en USE Lennegezh ha Skiantoù an Den hag ar studierien en USE Gwir-Ekonomiezh-Melestrañ, pe e master - kredadoù ECTS a vez roet da neuze.

Meur a strollad a vez, eus al liveoù A1 (deraoudi) betek ar C1 (implijerien ampart). Bez' ez eus ur strollad Galleg Eil Yezh (GEY) evit klokaat ar c'hinnig evit ar studieren etrebroadel c'hallek o deus ezhomm sikour evit mestroniañ ar skridaozañ er skol-veur.

Kinniget e vez ar c'hentelioù-se d'abardaez, etre 6e hag 8e noz, abalamour d'ar muiañ a dud da c'hallout dont. Da gustum e vez kinniget 20 eurvezh er c'hwec'hmiziad kentañ ha 22 eurvezh en eil c'hwec'hmiziad. Digor int d'an implijerien diavaez da SBI gant ma vo lakaet o anv ha paeet ganto dre ar servij skol-veur stummañ dibaouez hag a-bep-eil (SSSDE).

Gallout a ra ar repuidi er programm ProMESA mont d'ar c'hentelioù-se ivez.

Ar skolioù doktorelezh a ginnig ur vodulenn Galleg Yezh Arbennik (GYA) evit ar studieren doktorelezh dic'hallek.

Evit degemer ar studieren repuget eus Ukraina e oa bet lakaet kentelioù galleg a-ratozh e plas war goulenn Ministrerezh an Deskadurezh Uhel etre miz Genver 2022 ha miz Mezheven 2024. Klask a reer evel-se ober diouzh ma c'hallo an dud yaouank-se mestroniañ a-walc'h ar galleg evit kendelc'her gant o stummadur skol-veur keit ha ma vint en harlu e Frañs.

Ar Servij Stummañ Dibaouez (SSSDE) a ra war-dro aozañ an testeniekadur e galleg gant an DELF hag an DALF, evit ar studieren e SBI a fell dezho hag an dud diavaez.

II.4 Ur c'hinnig klokaat evit ar studieren

Ouzhpenn ar modulennoù yezhoù ret a zo er c'hinnig stummañ ez eus atalieroù kaozeal gant ar Pol Yezhoù e SBI e saozneg, spagnoleg, alamaneg, italianeg, ruseg ha brezhoneg. Buhezet e vezont e-pad an ehan kreisteiz gant studieren ampart war ar yezhoù-se (eus an estrenvro diouzh an dro), hag a zo bet enfredet evel heñcherien.

Un UK treuz « prientiñ da vont er broioù spagnolek » a vez kinniget en aotreegezh evit ar studieren na vestroniont ket ar spagnoleg.

Kentelioù advarrekaat a vez kinniget e saozneg d'an holl studieren e kevrennoù Brest, diwar ali o c'helennerien war ar yezhoù (daou strollad 12 studier a vez bep c'hwec'hmiziad).

Bep sizhun e vez kinniget obererezhioù enlinenn war Moodle d'an holl studieren, gant ma vint enskrivet d'ul lizher-kelaouiñ : 5 munutenn saozneg, spagnoleg pe italianeg.

II.5 Ur c'hinnig stummañ ha sikour ar c'hoskor

Ur c'hinnig stummañ zo evit ar c'hoskor e SBI evit ar yezhoù estren, hag a vez aozet gant ar servij stummañ e Renerezh ar C'hoskor (REK).

E 2023-2024 e oa 20 eurvezh kentelioù astennidik e saozneg evit tud ar c'hoskor ganto ul live izeloc'h eget B1. Tud ar c'hoskor a zo ul live uheloc'h ganto a vez broudet da gemer perzh er stummadurioù d'an daoulamm, en ur stumm « Staff Week », e SBI pe en estrenvro.

Atalieroù kaozeal e saozneg e vez kinniget d'ar c'hoskor gant ar Servij Obererezh Sokial a c'hallfe arc'hantaouiñ atalieroù yezhoù all ma vez trawalc'h a dud o c'houlenn.

An atalieroù kaozeal brezhoneg, a vez kinniget d'ar studierien, zo digor da goskor ar Skol-veur ivez, evel ar re a vez er yezhoù all (estreget ar saozneg).

Arc'hantaouet e vez ur skoazell d'ar skridaozañ e saozneg gant labourvaoù ar Skol-veur evit an ensklaskerien, d'ar berzhidi da zont da vezañ emren tamm-ha-tamm. E pep atalier e vez un droerez eus Burev Treiñ Skol-veur (BTS) hag ur gelenner saozneg evit sikour ar berzhidi da gas o labour skridaozañ da benn, koulz embannoù enklask ha skoroù evit ar c'hentelioù saoznek.

Gallout a ra ar c'hoskor kaout ur skoazell a-hiniennoù pe stummadurioù war ar yezhoù en estrenvro hag a vez aozet gant ar Pol Yezhoù, arc'hantaouet gant al labourvaoù pe ar servij Stummañ e renerezh ar c'hoskor.

Koskor ar Skol-veur eo a implij ar muiañ an obererezhioù enlinenn er stumm « 5 Munutenn bemdez » e saozneg, spagnoleg hag italianeg war Moodle.

II.6 Ur c'hinnig enlinenn gant Emglev Skolveurel Europa SEA-EU

Adal ma voe krouet an Emglev Skolveurel Europa SEA-EU ez eus bet ur strollad labour o studiañ an doareoù da ziorren barregezh yezhel ar studierien hag ar c'hoskor ha da wareziñ al liesyezhegezh war un dro. Daou labour a voe kaset da wir buan.

- Gant Virtual Tandem Language Exchanges (VTLE) e vez kinniget da holl izili an Emglev reiñ da c'houzout pa fell dezho deskiñ o yezh-vamm d'an dud all en eskemm d'un tamm skoazell war ur yezh all dibabet ganto. Gant ar sistem-se e c'haller kavout ar c'heveler europat a glot e c'hoantoù gant ar pezh emeur o klask.

- Goulenn a ra ar Virtual Language Courses (VLC) gant pep Skol-veur en Emglev kinnig bep bloaz ur gentel enlinenn pe meur a hini en e yezh vroadel. Ar c’hentelioù kempred, a-bell ha digoust, zo digor d’ar studierien ha d’ar c’hoskor. N’eus kredad stummadur ebet evito. Er bloavezhioù tremenet e oa bet lakaet ar pouez war al liveoù kentañ (A1, hag A2 da-c’houde). E SBI e vez kinniget 3 c’hentel damstank, 20 eurvezh bep bloaz, e Galleg Yezh Estren. Kalz muioc’h a c’houlennoù a vez eget an 20 plas a zo e pep dalc’h kelenn.

En eskemm d’ar striv-se e tlefe ar studierien ha koskor SBI kaout ur c’hinnig heñvel evit an 8 yezh all a gaver en Emglev.

II.7 Ar Burev Treiñ e SBI

Ar Burev Treiñ Skol-veur (BTS), ha n’eus ket kalz eveltañ er skolioù-meur e Frañs evit poent, a oa bet krouet e SBI e miz Gwengolo 2010. Diskouez a ra eo digor SBI d’an etrebroadel.

Kefridi pennañ ar BTS eo pourchas ur servij treiñ (en holl yezhoù), reizhañ/adlenn, jubenniñ, pe kement doare skoazell yezh a vefe hag a servijo d’an enklaskerien, d’ar gelennerien-enklaskerien, d’ar c’hevrennoù ha d’ar servijoù e SBI. Gallout a ra ivez ar BTS pourchas e servijoù da gement den pe ensavadur diavaez (skolveurel pe get) a c’houlenn.

Ur servij treiñ digoust a vez kinniget gant BTS, war-zu ar saozneg nemetken, evit dielloù zo hag a vez roet gant an deskadurezhioù e SBI (danevelloù notennoù, diplomoù, testenioù ha kement zo).

E skipailh BTS ez eus tri gwazour (troerien ha pennoù raktres) hag ur renerez kelenneriez-enklaskerez ; kenlabourat a reont gant ur skipailh troerien diavaez. Skoazellet e vezont gant ur guzulierez a vicher hag ur c’huzul skiantel.

II.8 Stad an traoù er stummadurioù a vez kaset en ur yezh all estreget ar galleg

Ouzhpenn an aotreegezhioù evit an arbennigourien war ar yezhoù ez eus stummadurioù hag a vez kaset penn-da-benn, pe ul lodenn anezho da nebeutañ, en ur yezh all estreget ar galleg.

E saozneg

Gant renerezh ar studioù ha buhez ar studierien (RSBS) e vez nevesaet roll ar stummadurioù a vez kaset e saozneg hag a c'haller kavout e saozneg e lec'hienn SBI : [Training programs available in English | Skol-veur Breizh-Izel \(univ-brest.fr\)](https://univ-brest.fr/en/training-programs-available-in-english).

Hiziv an deiz e kaver :

- En EST Brest-Montroulez, un International Business Programme, live Bak+3, ma vez kelennet 4 c'hwec'hmiziad e saozneg. Miret e vez 12 plas eno evit ar studierien etrebroadel ;
- En EST Kemper, ar c'hwec'hmiziad 5 er Bachelor Skol-veur a Deknologiezh (BST) evit ar C'henwerzh Etrebroadel ;
- En Ensavadur Skol-veur europat ar Mor (ESEM), an eil bloavezh master e Bevdeknologiezhioù mor hag an daou vloavezh er master Fizik Mor. Rannet e vez ar c'hentelioù, e saozneg, er master IMBRSea (International Master of Science in Marine Biological Resources) etre 3 bro evit ar c'hwec'hmiziadoù 7, 8 ha 9 ;
- En USE Lennegezh ha Skiantoù an Den e kinnig ar master Studioù Keltiek 2 c'hwec'hmiziad e saozned ha gallout a reer ober ur staj en ur vro geltiek saoznek. Ar master TSYE (Testennoù, Skeudennoù ha Lennegezh estren) a embann e vez graet 80% eus ar c'hentelioù e saozneg ;
- En USE Skiantoù ha Teknikoù eo digor eil bloavezh ar master RONE (Reizhiadoù etreoberiat, naouek hag emren) d'ar saoznegerien. En eil bloavezh an hentad etrebroadel en aotreegezh stlenneg ez eus kentelioù saozneg kreñvaet ha kentelioù stlenneg e saozneg.

War gartenn ar stummadurioù a c'haller kavout e saozneg ez eus 12 programm e Breizh :

- 3 e SVIB (100%)
- 1 e SBI (n'eo ket 100%)
- 8 e Roazhon.

229 a brogrammoù saoznek penn-da-benn a vez kinniget e Frañs ma vez roet un diplom broadel Skol-veur, evit mizoù enskrivañ broadel.

Evel holl izili an Emglev Skolveurel Europa SEA-EU e c'hall ar studierien hag ar c'hoskor kavout stummadurioù hag a vez kaset e saozneg, a-bell penn-da-benn pe war al lec'h ivez a-bep-eil (Blended Intensive Programmes, staff week, master TURQUOISE adalek miz Gwengolo 2025, kenlabour etre modulennoù kelenn, prezegennoù, ha kement zo).

E brezhoneg

Ul lodenn vras eus ar c'hentelioù en aotreegezh en hentad prientiñ d'ar c'helenn er c'hlasoù divyezhek brezhoneg-galleg, er gevrenn skiantoù an deskadurezh, hag er master MKDS kentañ derez galleg-brezhoneg.

Ar c'helenn divyezhek brezhoneg-galleg a ya war gresk a-galz er c'hentañ derez, met bevennet eo gant an diouer a gelennerien varrek. Emañ SBI e kreizig-kreiz ar politikerezh evit stummañ kelennerien vrezhonek nevez gant div stummadur :

- Ar Master MKDS Iañ derez divyezhek a vez kinniget en EBUKD Breizh, e Sant-Brieg
- An aotreegezh « Hentad prientiñ d'ar c'helenn er skolioù, arbennikadur kelenn brezhoneg-galleg », a vez kinniget gant Kevrenn Skiantoù ar Sport hag an Deskadurezh e Brest.

Ul lodenn vras eus an daou stummadur-se a vez kaset en-dro e brezhoneg, yezh labour an danvez kelennerien.

Abaoe 2015 e vez degemeret ar skol-veur hañv diwar-benn sevenadur Breizh hag ar brezhoneg⁵ e-pad pemzektevezh diwezhañ miz Mezheven gant ar pol Jakez Elias e Kemper. Buhez e vez ar skol-veur hañv e saozneg abalamour d'ar studierien ha d'ar gelennerien-enklaskerien etrebroadel dic'hallek da c'hallout ober anaoudegezh gant ar brezhoneg, ha gant istor ha glad Breizh. Div sizhunvezh kentelioù brezhoneg vez diouzh ar mintin ha prezegennoù ha gweladennoù goude merenn.

Betek-henn ez eus bet degemeret tost da 100 perzhiad deuet eus un 20 bro disheñvel.

II.9 Ar Garta *English-friendly*

E 2022 e oa bet votet ur garta « *English-friendly* » gant SBI evit aesaat d'ar studierien mont d'an estrenvro ha kavout labour. An argerzh « *English-friendly* » a c'hall bezañ evit ur gentel pe ul lodenn eus ur vodulenn gelenn, gant asant ar skipailhoù pedagogel a sell an traoù outo. Meur a live a c'hall bezañ, adalek ul levlennadurezh e saozneg pa vez kelennet ar gentel e galleg, betek sikour ar studierien war ar saozneg e-kerzh ul lodenn eus ar gelennadurezh, gant skorioù ar c'hentelioù e saozneg.

Gallout a reer ober gant ar garta-se evel un doare da brientiñ d'ar c'helenn a vo e saozneg penn-da-benn, pe evel ur skoazell war ar saozneg e-kerzh kentelioù hag a vez kaset en-dro e galleg dreist-holl.

Emañ testenn klok ar Garta er stagadennoù.

⁵ <https://nouveau.univ-brest.fr/breton-summer-school-crbc/fr>

II.10 Fiñvusted etrebroadel

Degemeret e vez studierien etrebroadel c'hallek bep bloaz e Skol-veur Breizh-Izel gant Campus France.

War zigresk eo aet fiñvusted ar studierien a zeu tre (Erasmus ha kendivizoù all) abaoe 2011, daoust ma oa bet un tamm kresk e 2021-2022. Dont a ra an div drederenn eus ar studierien Erasmus da SBI evit ar c'hursusoù Lennegezh pe Mezegiezh.

Fiñvusted ar studierien a ya er-maez (Erasmus ha kendivizoù all) a oa lañs ganti etre 2015 ha 2019, hag aet e oa war zigresk da vare ar bandemiezh, evel-just. Da-heul an enkadenn yec'hedel gant ar C'HOVID19 eo aet ar fiñvusted war zigresk, war a seblant.

Gant an digarezioù a-fet fiñvusted evit mont er-maez a vez kinniget da-geñver Emglev SEA-EU, e c'hall SBI skoulmañ darempredoù padus gant kevelerien a-fiziañs, hag un doare kaer eo da lakaat ar fiñvusted da greskiñ.

Ar c'hevelerezhioù start hon dez gant Kebek ha Sina a zedenn kement ar studierien eus Brest bepred, met bihan eo an niver a blasoù. Efedoù bras zo gant ar politikerezhioù broadel war ar c'hevelerezhioù en diavaez da Unaniezh Europa. Un efed bras zo gant ar mizoù enskrivañ evit ar studierien fiñvus war ar marc'hata hag ar c'henemglevioù a vez lakaet e pleustr.

III. An ezhoummoù a-fet barregezhioù yezhel e Frañs hag en estrenvro

III. 1 Kenempañ micherel hor studieren

Gant an emgavioù a vez gant tud a vicher er c'huzulioù barrekast en hor stummadurioù e weler pegen pouezus eo, e bed al labour, mestroniañ ur yezh pe meur a hini, el live B2 da nebeutañ.

III. 2 Fiñvusted ar studieren e SBI

Ar fiñvusted etrebroadel zo liammet da vat ouzh ar barregezhioù yezhel hag etresevenadurel. Pouezus eo diorren barregezhioù yezhel, e saozneg dreist-holl, evit an Emglev SEA-EU.

An darempredoù kemm-ouzh-kemm eo an dalc'h pennañ gant ar politikerezh fiñvusted e SBI, ha war a seblant eo ar saozneg ar yezh kehentiñ etrebroadel dre ret e meur a zegouezh.

III. 3 Yezh an obererezhioù enklask

E miz Kerzu 2023 e oa bet graet ur sontadeg kentañ diwar-benn ar barregezhioù war ar saozneg hag an implij anezhañ, da geñver an drevell 4.6 en Emglev SEA-EU war div dachenn skouer, ar sokiologiezh hag ar gimiezh.

Diwar an disoc'hoù a oa bet gant ar genlabourerien e SBI o doa respontet d'ar sontadeg e weler kement-mañ :

- Skrivet e vez nebeut, pe nebeut-tre zoken, a bosteloù e saozneg gant ar genlabourerien war an div dachenn enklask-se ;
- Etre 25 % ha 75 % eus an embannadennoù a vez lennet gant an daou strollad sontet zo e saozneg ;
- Ar sokiologourien ne glevont ket kalz saozneg e-skoaz ar gimourien da-geñver o labour enklask ;
- Selaou a reer muioc'h a saozneg eget ma komzer : dindan 25 % eus an amzer labour evit ar gimourien ha gwech ebet evit ar sokiologourien ;
- Er miz a-raok ar sontadeg e veze muioc'h a broduadurioù skrivet e saozneg, embannadennoù skiantel en o zouez, a-berzh ar gimourien eget a-berzh ar sokiologourien (hini ebet) ;
- An daou strollad a embann o deus ezhomm da wellaat o barregezh da gompren, da gomz ha da skrivañ saozneg.

Diouzh an dachenn enklask ma vezer, ne vez ket implijet ar memes yezhoù en embannadennoù. Ezhomm a vefe da gas un enklask donoc’h war ar yezhoù kehentiñ, ar galleg ha yezhoù all, en holl labourvaoù, abalamour da glokaat ar standilhon a zo bet studiet en enklask kentañ gant SEA-EU.

Hervez kont ez eo ar galleg ar yezh pennañ evit an darempredoù dre gomz ha dre skrid en un doare pemdeziek en darn vrasañ eus al labourvaoù e SBI.

III.4 Yezh ar mont en-dro melestradurel

Ar galleg a vez implijet en un doare pemdeziek en holl servijoù melestradurel e Skol-veur Breizh Izel, en diabarzh ha gant ar servijoù kembeliek.

Ar c’hoskor a genlabour gant ar skolioù-meur en Emglev SEA-EU ha gant ar gevelerien etrebroadel dic’hallek all, a ra gant ar saozneg avat pa vez kaoz eus an teulioù boutin etrezo.

Gant ar sontadeg a oa bet graet e miz Kerzu 2023 da-geñver SEA-EU e weler ez eus ezhommoù stummañ evit diorren ar barregezhioù daremprediñ e saozneg.

III.5 Yezh ar c’hehentiñ diavaez

E galleg eo an dafar kehentiñ e SBI. Bez’ ez eus un toullad teulioù ma vez kinniget SBI e saozneg.

Hervez ar Garta Ya d’ar Brezhoneg eo divyezhek galleg-brezhoneg ar panellerezh e kampusoù SBI. Gallout a reer kaout kartennoù-bizit en div yezh-se ivez.

IV. Klozadurioù diawel

War verr dermen

Fellout a ra d’ar strollad labour adlavaret ez eo ar galleg ur yezh etrebroadel, hag e ranker broudañ an dud d’ober gantañ er c’henoberoù etrebroadel.

Ar mennozh-se a glot gant ar c’hoant da ziorren modulennoù stummañ e saozneg pa vezont diouzh ezhomm ar skipailhoù pedagogel, war dachenn ar Skiant dreist-holl. Ar gelennerien hag ar gelennerien-enklaskerien a rankfe bezañ harpet da neuze evit delc’her gant ur gelennadurezh a galite. Ar boan a lakaont evit treuzfurmiñ o c’helennadurezh a zlefe bezañ kemeret e kont ha lakaet war-wel.

Pouezus-bras eo kendelc'her gant an obererezhioù stummañ war ar yezhoù evit tud ar c'hoskor, pe e vefent er c'helenn, er velestradurezh pe teknikel.

Mat e vefe kaout ur bilañs eus ar stummañ e Galleg Yezh Estren, evit lakaat ar stignad da vont diouzh ezhommoù ar studierien etrebroadel.

Respont a ra ar c'hinnig GYE enlinenn evit ar gevelerien SEA-EU (Virtual Languages Courses) d'ur goulenn. Dav e vefe diorren ar c'hinnig-se.

Gallout a rafe ar c'hinnig stummañ Galleg Yezh Estren bezañ kreñvaet ma vez krouet ur c'houmanant evel « 5 munut GYE » bemdez, ha ma vez kinniget un degemer diazezet war an etresevenadurelezh d'ar studierien etrebroadel.

Dav e vefe lañsañ ur c'houlzad evit sachañ evezh ar gelennerien, evit broudañ anezho da asantiñ gwelloc'h ne vefe ket mestroniet ar galleg akademek da vat gant an holl.

Lakaat paeroniañ muioc'h a studierien etrebroadel ha diorren an emglevioù etre kevredigezhioù studierien en etrebroadel a sikouro gwellaat fiñvusted ar studierien.

Erbediñ a ra ar strollad labour ledanaat ar c'hinnig testeniekadur er yezhoù e SBI. Mat e vefe d'ar c'hinnig testeniekaat mont betek al live C1.

Evit ar pezh a sell ouzh an alamaneg e c'hallfed stummañ ur stummerez en EBUKD Breizh war an TYDU.

Gallout a rafed kenlabourat gant ar Strollad Skolioù Evit ar Stummañ Dibaouez (SSESD) evit kinnig an DBY e brezhoneg. Ar skolioù hag ensavadurioù a fell dezho a zlefe gallout ober gant testeniekadurioù all, evel an TOEIC.

Dav delc'her da vrudañ ar brezhoneg, ha mont pelloc'h ganti.

Mat e vefe kelaouiñ gwelloc'h tud ar c'hoskor war an atalieroù kaozeal brezhoneg.

Erbediñ a ra ar strollad labour e vefe muioc'h a genlabour etre SBI hag an aozadurioù stummañ micherel war ar brezhoneg evel Stumdi ha Mervent.

War grenn dermen

Pa vo nevesaet ar c'hretadennoù e tleimp lakaat ar pouez war kelenn ar yezhoù en holl stummadurioù. Mat e vefe ma c'hallfe ar studierien studiañ un eil yezh vev.

Rankout a rafed kinnig ur gentel war ar saozneg er stummadurioù a vez graet e saozneg evit sikour ar studierien.

Mat e vefe kaout ur bilañs eus ar Garta *English-friendly* lec'h m'eo bet lakaet e pleustr.

Dleout a rafed gwelet hag-eñ e c'hallfe ar fredoù stummadur hir war ar brezhoneg bezañ kemeret e karg evit tud ar c'hoskor. Rannvro Breizh a c'hallfe reiñ ur skoaziad evit ar stummadurioù-se, a bad mizioù hag a goust etre 3 000 ha 5 000 euro.

Ur stummadur evit implijout ha dibab mat ar benvioù naouegezh artifisiel a-zere a sikourfe treiñ eus ur yezh d'eben.

Diwar al labour en Emglev Skolveurel Europa SEA-EU e c'hallfed krouiñ ur gelennadurezh voutin evit en em gompren etre ar yezhoù kar (etre ar yezhoù romanek, pe slavek, da skouer).

Hervez kont e c'hallfe an Emglev skolveurel bezañ ar framm gwellañ evit diorren ur c'hinnig stummañ liesyezhek. Kinnig a ra ar strollad labour e vefe lakaet un UK treuz e pleustr evit yezhoù all estreget ar saozneg hag ar spagnoleg.

Diorren Skolioù hañv pe programmoù d'an daoulamm a-bep-eil (Blended Intensive Programmes) evit ar yezhoù a c'hallfed ober evit ar c'hoskor hag ar studieren, en ur gemer redioù ar skolioù-meur a-fet deiziadoù e kont.

War hir dermen

Brav e vefe kaout muioc'h a skoroù kehentiñ e galleg, e saozneg hag e brezhoneg e SBI.

Erbediñ a ra ar strollad labour ne vefe kinniget e saozneg hag e brezhoneg nemet an titouroù na rankont ket bezañ nevesaet alies el lec'hienn internet ha war ar skoroù kehentiñ paper, kuit da zalc'her da reiñ titouroù kozh.